

PARDON SANT KONERI

War don zon Ann Durzunel.

Diredet euz ann Envo, ô sent koz Breiz-Izel :
Sant Tual ha sant Ieltaz ha sant Treuver Gwervel,
Sant Brieg ha sant Modez, sant Ouesa, sant Ervoan,
Deut da bardon Koneri, deut oll da Blouvouskan !

DISKAN :

Sant Koneri vinniget, ni ho ped a galon,
Roet d'imb oll hon mennad gant devez ho pardon.

Peger kaer eo ho pardon hag en de hag en noz !
N'oufe ket bean kaeroc'h du-hont er baradoz :
Enn hon c'halon vel en Ee man Jezuz binniget (1),
Hag oll zent koz Breiz-Izel aman zo diredet.

Evel ar stered enn oabl, ken koant o steredi,
E sao tanio a beb liou en bourk sant Koneri :
Ha ken kalonek ive hag ele ann Envo,
Ni gan da zant Koneri ken kaer kanouenno.

Eur bugel war lerc'h he vamm a red joauz bepred,
Ha war no lerc'h ken joauz e fell d'imp-ni kerzet
Hag ann oll, ouz hon gwelet, a lar kouitebunan :
« N'euz ket da garet ho zent evel tud Plouvouskan ! »

Ni oar pera hoc'h euz gret vit hon zud koz gwech-all
Pa c'heuiljoc'h d'ann Arvorik ho kinderv sant Tual :
Evit mad hon bro, sant kez, c'h euz kouitecet ho pro !
Trugare d'hac'h da viken trugare ni gano !

Eur beden dirak Doue evit ar Vretoned,
Eur beden evit ho pro ma vo kristen bepred !
Evit al labourerien ha tud vad ann odcho,
Eur beden, ô ma zant kez : Doue ho chileoo.

War ho lerc'h, war ann douar, ni a c'heuillo bepred,
Ni c'heuillo lezen Doue, enn hent al lealded :
War ho lerc'h, sant Koneri, didamal ha joauz,
Ec'h arrifomp, war eeun, enn Envo, gant Jezuz.

LAOUENANIG SANT ERVOAN.

KANTIK

AR VERDIDI HAG ANN OCHERRIEN

da

ITRON VARIA WIR SIKOUR GWENGAMP

O mam dener, o Gwerc'hez flour,
Itron Varia Wir Zikour,
Leviet bepret war ann hent mad
Ann ocher hag ar merdead.

Liez ann ocher neuz klevet :
« Et da Gwengamp hag e welfet
» Eur stereden kaer kaer ma zo,
» Itron Wir Zikour he hano. »

Hag ann ocher zo deut, Itron,
Da daoulinan dirak ho tron,
Deut da Wengamp deuz ann Arvor.
Da welet stereden ar mor.

TON : *Intanvez al lochen.*

Na pegen dous eo ho kwelet,
Stereden vor, Itron Wir Zikour,
Da noz, n'euz stereden ebet
Da steredi ken dous war ann dour.

N'euz mamm ebed Gwerc'hez Vari,
A zelve ken douz ouz he bugel,
Vel ma ret ouz ar verdidi
Hag ocherrien ho pro Breiz-Izel.

TON : *Voit-on chez vous
Les loups garrous...*

Enor hag enor, gloar a gloar,
Hag enn Ee ha war ann douar,
War ann douar ha war ann dour,
Enor d'Itron vad Wir Zikour !

TON : *Des ancêtres sacrés avez-vous le respect...*

Pa welfet ann avel, Itron Gwerc'hez Vari,
Ann avel hag ar gwach o ruillal hon listri,
O ruillal hon bago deuz eur garrek d'eben,
Bet sonj, bet sonj neuze, eo c'houi hon stereden.

Enor hag enor, gloar ha gloar,
.

Bet sonj, bet sonj neuze, ec'h omp bet daoulinet,
Enn hoc'h iliz Gwengamp ha dindan ho porchet,
Bet sonj e zo eur vamm ha bugale er ger,
Ha n'ho deuz da vevan nemet poan ann ocher.

Enor hag enor, gloar ha gloar,
.

TON : *Tro mare ar c'huz-heol meuz klevet trous nehour
(Barzaz-Breiz)*

Ha dreist pep tra, o Gwerc'hez, roet d'ann ocherrien
Gras da c'heuil hent ar furnez, evel gwir gristenien :
Ann den allaz ! zo re wag hag ar bed zo ker fall !
Chom war benn vo re diez, mar ne vec'h o tiwal.

O Mam dener, o Gwerc'hez flour,
Itron Varia Wir Zikour,
Leviet bepred, war ann hent mad,
Ann ocher hag ar merdead.

Bet bepred vit Breiz-Izel, bet bepred Gwir Zikour,
Ha neb lec'h ne valeo, vel he fotred, war dour :
Pa dalc'h sonj mad eur Breton eo badeet kristen,
N'euz d'en da drec'hi war-n-han, na ne vezo kiken !

Enor hag enor, gloar ha gloar,
.

TON : *Kantik sant Vinsant (Telen Gwengamp)*
PE : *Kalz amzer a meuz kollet...*

Kenavo Gwerc'hez Vari, marteze ken a vla !
Mar benn er ger adarre, me dei da bardona,
Me dei aman d'ho klevet ha d'ho trugarekaat :
Kalon ocher Breiz-Izel ne vo biken ingrat.

Pa vo pell deuz he diig, zo du-hont war ann od,
Diwallet bugaligo ha tud ar martolod,
Ha mar n'all dont da Wengamp, gant nozvez ho
Hi deuiio, sur, evit-han ha vit he anaon. [Pardon,

Enor hag enor, gloar ha gloar,
Hag enn Ee ha war ann douar,
War ann douar ha war ann dour,
Enor d'Itron vad Wir Zikour !!!

LAOUENANIG SANT ERVOAN.



IMPRIMATUR

1^{er} Juillet 1896.

LE PROVOST, vic. gen., arch. Trec.